


DA ZANT THIVIZIO

MEULEUDI HA PEDEN

ANDANTE.




Ka-nomp, ka-nomp gant le-ve-nez. Meu-leu-di



'Pa-tron ar bar-rez, Ha gou-len-nomp, dre ar be-



den. Eus he ven-nos an a-lu-zen. Ha gou-len-



nomp dre ar be-den, Eus e ven-nos an a-lu-zen.

2

E kichen Dol e zeo ganet
Ha Thivizio e voa hanvet;
Var he gavel lagad Doue)
A voa o para nos ha de.) *bis.*

3

Ar c'haera bugel tro-var-dro
A voa dizale Thivizio:
Lagadig glas ha bleo melen)
Mouez eostik o kana laouen:) *bis.*

16

D'ar vugale roit ar furnez
D'ar iaouankis ar zantelez,
Ha d'ar gosni guir joaüsted,)
D'an holl bennos hag eürusted.) *bis.*

17

Sikour ive d'ar bec'herien!
Roit d'ho spered ar sklerijen
Hag an domder d'ho c'halonou)
Gant eol benniget ho krassou.) *bis.*

18

Lezit ar gliz euz ho pennos
Da zisken varnomp deiz ha nos,
Ma zavo pul frouez an douar)
Dindan eol tom ha glao klouar.) *bis.*

19


Gant alc'hoez aour ho pedennou
Digorit deomp dor an envou,
Ha ni' gano deoc'h mill bennos)
E kreiz dudi ar barados.) *bis.*

Quimper, le 6 Février.

IMPRIMATUR:

J. SERRE, Vic. Gén.

Brest, imp. rue du Château, 4.



4

O kana iaouen da Zoue
Fors meuleudi a garante,
En eur zioual denvedigou)
Var letoun flour an torgennou) *bis.*

5

O velet ar bugel santel
Gant spered lem, skiant huel,
Arc'hescob Dol a lavare:)
Va bugel koant, deus ganen-me) *bis.*

6

Mill bennos deoc'h, o va Otrou!
Ha ken-avo, denvedigou!
Ho tilezel e ran joaüs,)
Evit beza oll da Jesus.) *bis.*

7

A zivar neuze ar mesaer
A ra buen eur studi kaer;
Evit beza den a Ilis)
E ro bouked he iaouankis.) *bis.*

8

Beleg iaouank, meuledi deoc'h!
Spered Doue a zo ganeoc'h;
Ho santelez a zo dispar,)
Eun El e zoc'h var an douar.) *bis.*

9

Gant ar veleien hag ar bob
Choazet da veza Arc'hescob,
C'houi a gasso d'ar peuri mad)
Denved Doue, hor guella Tad.) *bis.*

10

Nag a draou kaer ha burzudus
Gret ganeoc'h en hano Jesus,
En eur brezeg, var douar Breiz,)
Lezen Doue d'an dud difeiz!) *bis.*

11

D'ar c'hlanvour kez c'houi ho peus roet
A bers Doue nerz ha iec'hed,
Ha d'ar maro eun eil vuez)
Dre eur beden a garantez.) *bis.*

12

Goude buez ken burzudus,
Eur maro santel hag eürus
A zigoras deoc'h, Thivizio,)
Ar barados evit ato) *bis.*

13

Gant an Ilis, hor Mam zantel,
C'houi ' zo savet e renk huel
E touez ar Zent hag an Elez,)
Gant kurunen ar zantelez.) *bis.*

14

Euz bar an env sellit brema
Diouz ho pugale o kana,
O kana deoc'h meuleudiou
Gant ho c'halon hag ho moueziou,) *bis.*

15

En hor parrez, dre ho pennos,
Ra vevo feiz hon tadou koz!
Hon diouallit diouz ar skuer fall)
A ra goasoc'h eget tan-goal.) *bis.*